



GWERZ NEVE

ZAVET ENN ENOR DA

ZANT VAURIS

Euz a behni ar chapel, e parrez Zan-Vêk, a so meur-
bet hentet gant ar gristenien vad.

War don : *Ni ho salud, Stereden vor.*

DISKAN :

O zant bras ebars ann Envou
Goulennet evidomp grasou !
Ners hag iec'het peoc'h, ha pardon,
Karante Doue n'hon c'haloa !

1. Chilaouet, m'ho ped, Bretonet,
Bue eur zant, eunn den kalet,
Bue Mauris, soudard Jesus,
Ha mignon ann dud ankeniuz.

2. Enn eur gleyet he oll boaniou,
Skrivomp don enn hon sperejou,
Ema ret evit mont d'ar gloar,
Andur gant fe war ann douar,

3. Goude hon zalver daou-c'hant vla,
Ebars enn plenen Agona,
E kichen Frans, eur vro brudet,
Mauris a zo bet merzeriet.

4. Ann impaler Maximian,
Eur prins dirollet ha Paian ;
A c'halvaz Mauris da vonet
D'ar brezel gant he zoudardet.

5. N'en devoa ket enn he arme
Gwelloc'h zoudardet evit-he ;
Prest da zenti ha da gerzat
E kreiz ann tan hag ar gombat.

6. Ouspenn, Mauris hag he vanden
A oa start el lezen gristen,
Hag enn eur dougen ar c'hleze,
E vevent e doujaas Doue.

7. Gant he fals doueou dallet,
Ann impaler, p'en d'uz klevet,
Leun a fulor hag a gounar,
A glask Mauris, hag a lavar :

8. *Petra glevann-me, kabiten !
C'hout, skouer ann armeou romen,
A dilese hep mez ebed
Doueou Rom, mestres ar bed !*

9. *Mauris, Mauris, ma chilaouet,
Kenkouls ha c'houi, he zoudardet,
Adoret doueou ar Vro,
Pe d'ar vue, pe d'ar maro. »*

10. *Raktal, he dorn war he gleze,
He daoulagad war-zu Doue,
Mauris, bepret krenv ha dispont,
Da Vaximian a respont :*

11. *« Impater bras ar Romanet,
Ni zo, gwir eo, ho soudardet,
D'ac'h eo hon c'horf, mes hon iue
zo bet prenet gant Mab Doue :*

12. *C'houi ro d'imp enor ann armou :
Mes digant Doue ann Envou,
War hon zechou fall pa drec'homp
E teu kaeroc'h enor warnomp ;*

13. *C'houi ro d'imp hon magadurez
Mes Doue, dre he vadelez
A dalc'h enn hon memprou bue :
Hen da gentan, ha c'houi goude !*

14. *Evidoc'h ni skuillo hon goad,
Beleg ann divezan berad :
D'ho toueou. oh ! nann, biken
Na rimp nag ezans na peden !*

15. *Daru dra pelzo hon euz touet :
Karet Doue, hag ho karet ;
Mes, mar disprifemp hon c'hrouer,
Perak plegan d'hon impater ?*

16. *Hon breuder hoc'h euz merzeriet,
Evel Jezuz int bet lazet,
Ha gant Jezuz n'he Varadoz,
Emant breman ouz hon gortoz.*

17. *Pa c'houlfemp impli hon c'hleze
Warnoc'h e trec'hfemp marteze.
N'ho pet ket aoun, ni a bedo
Evidoc'h c'hoaz war ar maro.*

18. *Pegen kaer eo merveldiolam
War galon Jezus hag he Vamm !
Na vimp ket treitour d'hon tezen,
Kristen omp evil eur biken. »*

19. *Pa glev ar pañan diatur
Komjou ken nerzuz ha ken fur,
Ho c'hondaonaz, oll a vanden,
Eno da vervel, enn draouien*

20. *Ar c'habiten, a vouez uhel,
D'he dud a lare, kent mervel,
« Na grenet ket, ma breuder ker,
O pebez gloar, gloar ar merzer ! »*

21. *Ha war ho daoulin, dizarmet,
Ho goug e noaz ho deuz laket :
Ar bourrev a sko, didrae,
Ho goad a red gant ho bue*

22. *Pesort kalon na vije ket
Gant ar glac'har neuze rammet,
O sellet ouz tud a vrezel,
Evel oanet kez o vervel.*

23. *Elet, gant peb a gurunen,
A diskennaz war ann dachen ;
Ha zul tol bourrev e tougent
Eunn ene da balez ar Zent.*

24. *Prestik ive war ann douar
E voe anaaveet ho gloar ;
Ha warlerc'h ken hir eunn amzer
Ho feder c'hoaz hag ho meuler.*

25. *E Zan-Vek, e kreiz Breiz-Izel,
Zant Vauris en deuz eur chapel ;
Kalz a deu da glask he zikour,
Hag euz he feunten d'evet dour.*

26. *O lec'h a belzo beniget,
Gant hon tud koz darempredet,
Zeliou Mauris warnoc'h a bar,
Houi zo he di war ann douar.*

27. *Portret ar zant, he relegou,
He feunten a ra burzudou :
O Bretonet, pebez tensor,
E Zan-Vauris a zo digor !*

28. *C'houi, tud dalc'het gant klenvejou,
C'houi tud poaniet enn ho memprou,
Paour pe binvik, e peb mare,
Bet fians enn he drugare*

29. *C'houi, pried mad ha mamm dener
Petra neuz ket gret n'ho kenver ?
Dizec'het en deus ho taerou,
Rentet ar peoc'h d'ho kalonou.*

30. *Bugelik koant neve ganet,
Den koz gant ann oad diskaret,
C'houi dreist oll, zoudardet ar vro,
Mauris ho kar hag ho karo.*

31. *Goulennet iec'het digantan,
Iec'het ann ene da gentan ;
Ar c'horf, kaer a vez, a gouezo,
Ann ene bepred a bado.*

32. *Goulennet ma chomo dalc'hmad
Deün ho re-vian war ann hent mad,
Mac'h amzavint evit Roue
Jezuz ho zad hag ho Doue.*

33. *Ken na vimp eet oll war-ann-dro,
Tud ha bugale, d'hon gwir vro,
Bro ar Zent, bro hon tadou koz,
Enn eürusted ar Baradoz.*

AMEN ! AMEN !

Propriété de l'Éditeur, Vve LE GOFFIC.,